

kazetenn ar stourmoù e breizh

10 lur

bremañ

MEURZH 1983

Niv. 18

KENDALC'HOMP DA STOURM !

LAKAAT DIWAN
ER SERVISJ PUBLIK

Mantret e choman o lenn war bajenn 10 niverenn 17 Bremañ, ar pennadig o tennañ da "Kraisterion Vreizh" ha goulenn a ran digant skipailh Bremañ petra na ar pennadig-se barch ar gazetenn. Daoust hag en eo noll Bremañ da embann traoù e giz-se ? Dreist-holl pa ouezer ervat n'eus "Kraisterion Vreizh" netra da wabout gant kraisterion Vreizh e gwirionez.

Goulenn a ran ivez e la-varle dir skipailh Bremañ penak e ra anv war ar memes niverenn eus ar 10 goulenn o tennañ d'ar votadegoù tiezh-hen. Ne vefe ket ar 11vet hen pouezus hag ar re all? Sed ar pezh a c'heller soñjal da vihanañ pa lenner "war ar marc'had" (pe e galleg "question subsidiaire").

Kalon vat d'ar skipailh memestra.

Yann-Fañch Kerreiz
Ouzieau (62)

1 - Embannet e vez ar c'hemennadennoù a vez kaset dimp : n'eo ket evit se e savomp a-du gant ar re o c'has. Heñvel evel just gant al lizhiri.

Goulennit



bremañ

15 niverenn+n.0

150 L

KORN AR

C'HEVREDIGEZHIOU

Plijet bras e veler o lenn e-barzh Bremañ pennadigoù pouezus Jil Killeverer diwar-benn c'hoarierien skrabell (vrezhonek ?) Roc'h Tredudon. Plijetoc'h c'hoazh gant soudarded hozh ar A.F.N.

Tugarekaat a ran ivez J.K. da vezañ deshet dir e oa Sant Brieg e Bro-Dreger.

Mark Kennain
Roazhon



Pebezh mezh lenn e "Bremañ" e vije Rozenn Milin ha Bernez Gnall kilstourmerien a-enep ar brezhoneg ! E-touez ar re a stoum bemdez evit denc'hel ar brezhoneg bev emaint, eveljust, evel ma c'hell klevout pep hini ac'hanomp.

Piv er deus graet ar muiañ evit ar brezhoneg, int pe ar hini er deus skrivet ar pennad euzhus hag heugus-se ? Ha re e vijemp er emsav ? C'hoant am eus da zislonkañ.

Dalc'homp hon tamalloù evit ar c'hallaoued ! Ha, mar plij, na embannit ket forzh petra. Ar brezhoneg a varvo na emganno ar vrezhonegerien kenetrezo.

A galon, gant tristidigezh.

Mikael Treger
Fihvskedennet

11 Gouenn S.A.E.

e Gwened

Souezhet-mat "Skol-an-emsaverien" Gwened o lenn respontoù an danvez kuzulierien :

.Hini an tu-dehou : mann ebet ennañ eveljust. Koulskoude, ar maer nevez, ur brezhoneger a-vihanik anezhañ zo a-du gant difenn ar yezh...

.Hini ar re c'hlas : a-du gant tost an holl ginnigoù hag o c'houlenn ur referendum diwar-benn Naoned er pemp departamant.

.Hag erfin hini an tu kleiz : ur respont nac'h evit ar pezh a sell an divyezhegezh... ar fedoù e Gwened, emezo, n'int ket gant ar brezhoneg. Tri eus UDB hag unan eus Kendalc'h ar ganto...

Spontet ar memes "Skol-an-emsaverien" o welet ar memes respontoù digant an tu-dehou hag an tu-kleiz o tigouezh nemet tri devezh araok ar votadegoù, just goude bezañ embannet ur pennad er gazetennoù o c'houlenn ketoù eus al lizhernoù kaset dezhe div sizhun araok...

Herve ar Bihan,
Gwened.



Brud a glever kostez R.B.I. e Kemper. Deut eo nevez zo ur spier a-berzh Paris da vezhiañ ar pezh a vez graet : "Il existe des chanteurs de variétés qui ont fait leurs preuves" emezañ morvat peogwir e kav dezhañ ne vezont ket klevet a-walc'h. Na petra 'ta.

.War un dro e yafe kuit meur a hini e-touez an animatourien wellañ ac'han d'an hañv : Kristian GONIDEG a ra war-dro an abadenn blijus "entre chien et loup", Remi DERRIEN ha Rozenn MILIN. Gwir eo n'eo ket ur vuhez labourat bemdez e-barzh R.B.I. gant evezhiañ ar renerien eurvezhoù labour forzh pegement, sul, gouel ha pemdez, d'an nebeutañ evit ar re, evelto, a glask ober labour dereat e-lec'h tremen forzh pe-seurt diotach a-hed an deiz, (evel a c'hortozet diganto ober). Marteze ne blij ket atav stil Remi DERRIEN d'an holl, met anat a-walc'h eo e lak kalz brezhonegerien da selaou ar radio: plijout a ra ivez da galz tud. Rozenn MILIN n'he deus ket kalz amzer da ehanañ kennebeut gant an abadenn vrezhoneg penn-dabenn nemet etre 4 eur ha 5 eur d'abardaez. Marteze eont kuit, piv a vo gouest d'ober war-dro an abadennoù-se? Hag ur politikerezh bennak zo gant R.B.I. (pe Radio-France) evit stummañ brezhonegerien? Pell emaoomp c'hoazh eus ar 5 eurvezh hanter brezhoneg bemdez.

.Diouzh un tu all eo un tammig gwelloc'h evit ar c'heleier brezhoneg : hiroc'hik e vezont pa vez lakaet daou gazetenn asambles, ur gazetenn ouzhpenn zo d'ar sul da noz. Met a-hend-all, ez eus bet rebechet e veze roet keleier re alies gant ur vrezhoneger e ampant... rak ne oa ket ar gartenn kazetennerezh ganti.

.An abadenn "tro-war-dro" gant Rozenn MILIN, 'zo bet gouestlet d'ar gelaouenn "BREMAN" d'al lun 7 a viz Meurzh 83.

.Abaoc'h ar c'hentañ a viz Genver 1983 emañ Radio Arvorig dindan renerzh Radio-France.

.FR3 Breizh ha Broioù al Liger a zeufe da vezañ ur gevredigezh emren a-benn ar c'hentañ a viz Genver 1984.

.Per Ar Flaoc'h an hini a zo e penn an abadennoù brezhonek evit ar mare. Fanch Broudig en deus kavet gwelloc'h ober war-dro ar c'heleier 1.560.000 lur a zo bet lakaet e-barzh budjet FR3 evit sevel 44 abadenn "Breizh o vevañ" e 1983. Met 2.000.000 vefe ret kaout da nebeutañ. Evit kas da benn mat promesaoù ar "chart" (da lavarout eo 2 wech muioc'h a abadennoù) e vefe dav kaout eta 4.000.000F.

Tangil Louarn



LEVR DA LIVAÑ

Nolig An Olifant



10 lur

Skol An Emsav

DAFUD GRUFFUD FANS
MOA FANS

EN EM GAVET EO NOLIG !

Skol An Emsav

sac'het gant an diouer a arc'hant



Sekretouriezh Kreiz Skol An Emsav

Pa ranker mont da ensellerezh al labour evit goulenn an aotre de lakaat er maez labourerien Skol An Emsav, e klasker kompren meur a dra :

- Daoust hag en ez eo abalamour ma n'eus mui eus "Chart Giscard" ? ... Sur a-walc'h !

- Daoust hag en ez eo abalamour ma teu diouer a arc'hant diwar diouer a youl ? Kazi sur ivez.

Neuze, soñjit en dra-mañ, n'eo ket nevez : Ne dalv ket ar boan deomp bezañ atav o youc'hal war b-Paris (daoust ma 'z eus abegoù d'hen ober) nag o terc'hel prezegennoù evit goulenn ma vefe tu da vrezhonegerien labourat en o yezh, ma ne vezomp ket gouest ni da zerc'hel ar re a labour dija.

Kement-mañ a dalv evidomp da c'houzout ma ouezomp e gwirionez ar pezh a fell deomp.

800 lenner x 200 lur = 1 Chart Giscard. Kasit ho chekenn : 8, straed Hoche -Roazon

Ar Merour

DIWAN un trec'h ouzhpenn!

D'an 9 a viz C'hwevrer eo, goude bezañ c'hoariet ar pounnerlev e-pad bloaz hanter en deus kinniget ar Rektordi un emglev all da Ziwan.

Daoust dezhañ bezañ ur c'hammed a-bouez e istor Diwan, chom a ra an emglev-se treutig a-walc'h e-keñver ar brud a zo bet savet diwarnañ ha tro dro dezhañ.

Disoc'hoù an emglev

a-58 milion 'vo ret da Ziwan evit ar bloavezh skol 1981-82 pa 'z eus bet un toull a 66 milion evit ar memes bloavezh, hag 20 % eus budjet ar bloaz-mañ, pa vo un toull ken bras ma n'eo ket brasoc'h c'hoazh Felec'h emañ ar gounit?

b-Un emglev all a zlefe bezañ sinet ac'hann da viz Gwengolo 1983 e- vit ma vefe paet ar skolaerien gant an Deskadurezh. Met, evel ma lavar an Ao. Rollin, ne vo ket sinet an emglev-se gant Diwan a-stroll, gant ar skolioù unan hag unan e vo graet.

Ar brud a zo aet hag a za stav o kemenn : "setu bremañ e c'hellimp kemer amzer vak !". E gwirionez, Diwan n'en deus ket gounezet kalz a dra betek-hen, daoust d'ar pezh a c'heller krediñ, pa ne vefe brud gwelloc'h e-mesk tud 'zo marteze...

Hag ar gwashañ 'vefe eveljust gwelout an ensaverien o lezel an traoù da vont : A-benn 3 bloaz amañ ne vefe mui deus Diwan, siwazh.

Diwan hag ar skolioù poblek divyezhek

E soñj an Deskadurezh Stad, hag ar soñj-se zo bet lakaet du war wenn dija, "skolioù Diwan a zlefe reiñ o flas da skolioù divyezhek war verr dermen" da lavaret eo : eus ur gelennadurezh hollvrezhoneg e tlefeomp distreiñ d'ur gelennadurezh e galleg gant un neubet curvezhoù brezhoneg (5 pe 6).

E Sant Rivoal e vo savet ur seurt skol e miz Gwengolo 83 ha marteze ivez e Lannuon, e Brest hag en Oriant. Ne ouezer ket re vat. Gwelloc'h evit netra a drasur, met ur wech ouzhpenn, e-pelec'h emañ an divyezhegezh aze ?

Nag a boan a zo dija gant ar skolioù hollvrezhoneg da lakaat anezhe da vrezhonegiñ kene-trezo, ha kement-mañ a-balamour da bouez an endro galleg.

Ma fell deomp kaozeal eus divyezhegezh e gwirionez, an dibab a zo sklaer : **MONT WAR-RAOK HA DIGERIN KLASOU NEVEZ HOLLVREZHONEG KOUSTO PE GOUSTO !**

Klasoù nevez

Er 6 miz o tont e vo savet : 6 klas nevez (er skolioù a zo dija) -Klasoù evit ar re vihan e **Gwengamp** ha **Sant Brieg** -Klasoù kentañ derez : **.CM1 e Lannilis** **.CE2 e Kemper** **.CE1 e St Brieg, Roazhon**

Hag 8 skol nevez : -Skolioù mamm e :

.Bro Bagan, Bro Landi, Bro Douarnenez, Gwened, Pempoull ha Lannuon.

-Kentañ derez e : **.Kastell-Paol, An Oriant**

Ha ma rank Diwan digeriñ ar c'hlasoù-se hep aotre ar Rektordi e vo ret dezhañ kaout ar c'hant eus un tu bennak. Anat eo, anat e tlefe bezañ d'an holl, n'eo ket ar 16 skol a zo hiziv an deiz a cheñcho un dra bennak, e stad an divyezhegezh e Breizh.

Dre ma 'oa berr Diwan gant an arc'hant, ne oa ket embann levrioù, prenañ danvez pedagogel. Hiriv gant an arc'hant a zo o tont e vo tu da stankañ an toullou. Kement-se a zlefe reiñ kalon d'an holl da genderc'hel ha n'eo ket chom a-sav. Galv A. Lavanant, Prezidiat Diwan, a zo bet sklaer war ar poent-se dilun d'an noz e Brest.

.Derc'hel da skoazellañ Diwan war dachenn an arc'hant a ranker (skodennoù miziek, gouelioù hag all...).

.Krouiñ Kuzulioù Skoazell nevez a-benn da zigeriñ klasoù nevez er bloaz-mañ pe er bloaz a zeu.

.Sikour da embann levrioù evit ar vugale. Un ti embann "An Here" a zo bet savet nevez 'zo.

.Diorren ar c'helenn brezhoneg er metoù all, estreget Diwan (kentelioù noz, stummadur dibaouez)

.Kreñvaat ar stourmoù evit an divyezhegezh e Breizh.

.Hag eveljust, kas muioc'h-mui a vugale e skolioù Diwan.

Jil Killever.

BUREV AR C'HUZUL SEVENADUREL

a-du gant ar C'HAPES brezhonek ... e galleg (pe ur yezh all bennak)

PLATE FORME DE DISCUSSION
AVEC MONSIEUR LE MINISTRE DE L'EDUCATION NATIONALE

Paris le 15 février 1983

- 5 points à l'ordre du jour :

- le C.A.P.E.S.
- la formation initiale
- la formation continue
- les créations de postes
- l'information des familles

1 - Pour le CAPES, l'unanimité s'est faite sur le principe d'un CAPES spécifique "breton-celtique" qui serait rattaché à un nouveau bloc, celui des langues régionales. Pour ce CAPES, il est souhaité des exigences scientifiques de haut niveau. Il associera des épreuves proprement linguistiques, non seulement en breton mais aussi dans une seconde langue celtique et des épreuves de civilisation portant sur les éléments historiques, artistiques et littéraires de la Bretagne, y compris en langue française et en gallo. Il a également été souhaité une connaissance de la situation des autres langues et cultures régionales de l'hexagone (y compris celles du domaine d'oïl) et recommandé l'aisance dans une langue étrangère (en la circonstance plutôt l'anglais, l'allemand étant recommandé de préférence aux alsaciens et l'espagnol aux basques et catalans...).

Le canevas suivant d'épreuves est proposé :

- à l'écrit :

- une épreuve de langue bretonne avec une version de trois heures et un thème d'une heure liés
- une dissertation littéraire (en français ou en breton) !!
- une dissertation en français portant sur la culture et la civilisation (de Haute comme de Basse Bretagne).

- à l'oral :

- une épreuve de seconde langue celtique
- une explication de texte sur le programme en breton
- une épreuve de hors programme sur la culture et la civilisation bretonnes.

2 - La formation initiale est soit en amont du CAPES si l'on considère l'Université, soit en dehors si l'on envisage les Ecoles Normales.

. Pour l'Université, la mise en place d'un DEUG et un renforcement des moyens sont indispensables.

. Pour les Ecoles Normales, aucun instituteur ne devrait en sortir sans avoir reçu une initiation sensibilisatrice à la langue (rudiments de grammaire et de vocabulaire - familiarisation avec la toponymie et l'anthroponymie...) à la culture et à la civilisation des cours spécifiquement linguistiques (breton et/ou gallo) étant dispensés aux élèves-maîtres intéressés.

3 - La formation continue doit être renforcée avec trois priorités :

. le renforcement et la gestion académique des moyens mis en oeuvre pour le cours de langues et de cultures bretonnes par correspondance assuré par le C.N.E.C.

. La mise en place d'un service spécifique "langues et cultures bretonnes" au sein des C.R.D.P. de RENNES et de NANTES, des C.D.D.P. de QUIMPER, SAINT-BRIEUC et VANNES et du C.L.D.P. de BREST.

. L'organisation de stages plus longs avec remplacement des enseignants dans leurs classes.

4 - La création de postes est indispensable. Il convient de préciser le plan ministériel de 3 ans et d'en établir la programmation.

L'intégration des cours dans les services doit être obtenue. Il convient de ne pas négliger les besoins qui se manifestent hors de Bretagne, principalement en région parisienne.

5 - Information des familles

Une information généralisée des parents et des élèves sur l'intérêt de l'étude des langues et cultures de France (accompagnée de la suppression de l'autorisation préalable dans le 1er degré) semble indispensable avant même le recensement des besoins.

Le Bureau du CONSEIL CULTUREL DE BRETAGNE

KELENN AR BREZHONEG E 82-83

DEPARTARANT	NIVER AR SKOLAJOU	BREZHONEG ENNO	NIVER AL LISEOU	BREZHONEG ENNO	NIVER AN L.E.P.	BREZHONEG ENNO
22	46	21	11	09	15	2+2 (*)
29	65	28	18	13	14	00
35	51	16	14	09	10	01
56	39	05	06	05	11	03
En holl	201	70	49	36	50	6 + 2

. An daolenn-mañ zo bet savet diwar dielloù Akademiezh Roazhon.

. Keloù ebet digant Akademiezh Naoned.

. Skolioù lañ derez : respont ebet digant ar 5 ensellerezh.

(*) Ar skolidi a ya d'ar c'hentelioù en ur skol all.



CHOM A RA BREIZH EN TU-KLEIZ

N'eo ket aes tennañ kentelioù war verr-dermen diwar an dilennadegoù er c'ho-muniou. Penaos keñveriañ an dregantad-mouezhioù a oa bet da lakaat Prezidant ar Republik en e blas gant dregantadoù ar 503 297 kuzulier-kêr a oa da zibab etre div dro ar 6 hag an 13 a viz Meurzh diwezhañ e Frañs a-bezh.

Klaskomp memestra gwelout peseurt stumm zo bet ganto e Breizh. En dro gentañ, tra ma seblante an tu kleiz mont war gil e Bro-C'hall, e chome kalz stabiloc'h en hor Bro, daoust ma oa bet kollet gantañ Naoned ha Brest, ha ma oa digresket mouezhioù an tu-kleiz e-keñver mouezhia-degoù mae ha mezheven 81 en Oriant, e Kemper, e Montroulez, e Gwengamp, e Sant Nazer, e Roazon, e Lanuon, e Sant Brieg. Abalamour da se ivez, moarvat, n'eo ket bet gwelet e Breizh, en eil tro, ar wellaenn zo bet gant an tu kleiz e Bro-C'hall. N'heller ket lavarout hiziv an deiz, e vot ar Vretoned evit un tu dehou muioc'h eget evit an tu kleiz. Kêrioù eus Breizh-Uhel, zoken, Foujera ha Redon, zo bet gounezet gant an tu kleiz. Un dra avat a zo memestra : digresk levezon ar PCF. Ma c'hounez BEAR e Bro Dreger, e koll PENMARC'H, KONK-KERNE, AN UHELGOAD, SKAER, KERC'HOR, GWENGAMP... evit brasañ gounid an tu de-

hou pe dar P.S. Mont a ra zoken ar P.S.U. pe an U.D.B. tost pe dreist dezhañ a-wechoù : da skouer en dro gentañ e




PONT'N ABAD (PSU:9,9 %-PCF: 12 %), e LOKTUDI e tegouezh al listenn UDB/PSU dirak ar PCF hag e lak daou zen (Perrot ha Donnard) e-barzh gant 13,7 %. Sur a-walc'h, avat ez eo bet disemglev an tu kleiz e Bro-Vigouden, kaoz da drec'h an tu dehou: e Pont 'n Abad e oa gant strolladoù an tu kleiz (PS,PCF,PSU) 7 mouezh ouzhpenn listenn an tu dehou en dro gentañ. Ha n'o deus tapet nemet 46 % asamblez en eil tro. E Penmarc'h eo bet gwashoc'h c'hoazh evit listenn an tu kleiz. Kaset gant ar PCF en eil tro ha trec'h het gant an tu dehou, daoust d'un niver kalz brasoc'h a vouezhioù en dro gentañ.

An ekolojisted dre vras zo deut a-benn da zifenn madig a-walc'h o flas hag o deus lakaet tud e-barzh pa n'eus bet nemet un dro (da lavaret eo o doa ouzhpenn 5 %) : da skouer e Kemper (6%) hag e Gwened (6%). Met

alies e veze kavet war al listennoù-se tud ne oant ket ekolojisted hep ken, pa fell dezho ur vuhez politikel disheñvel, tostoc'h eus an dud. Anvioù al listennoù a zo un arouez a-gementse : "Gwened Arall", "Penmarc'h Autrement", "Kemper-Ecologie". Ar vot zo bet en eil tro, e Roazon da skouer, a ziskouez eo aet al lodenn vrasañ eus o mouezhioù war an tu kleiz : mouezhioù a gleiz eo a zo aet ganto eta, tud n'int ket adu gant politikerezh ar gouarnamant, hag a felle dezho hen diskouez hep reiñ e chañs en-dro d'an tu dehou o chom er gêr. N'eo ket mouezhioù "ekolojist pur eta met reoù a c'hellfe bezañ adkavet e-lec'h all ur wech all.

Maer kentan U.D.B.

AN U.D.B. a gavo er votadegoù-se peadra da vezañ laouen : da gentañ peogwir e vo evit ar wech kentañ ur maer UDB: Iffig REMON e Sant HERNIN a zo aet bremañ en Istor. Hag e Lesneven, listenn an tu kleiz, kaset gant an U.D.B. (Jean JESTIN) he deus dastumet 20 % en dro gentañ. An emglevioù gant ar PSU e Bro Vigouden pe gant an Ekolojisted (Gwidel) o deus graet berzh. Daoust m'eo bet koll abalamour da drec'h an tu dehou e lec'hioù zo (e Brest hag e Naoned n'o devo mui nemet ur c'huzulier), pe evit abegoù



Jacques Faucheux - Maer Foujera

lec'h 2 ; e Gwengamp e vank 7 mouezh evit kaout 5 % pa oad o c'hortoz muioc'h a verzh), e vo gant an U.D.B. muioc'h a guzulierien eget n'he deus bet morse. Lakaat a ra, evit ar wech kentañ, kuzulierien e parrezioù 'zo evel KASTELL-PAOL (Jacques Henry).

rez d'un emglev ledan eus ar P.C.F. betek ar "c'hreiz".

Ar votadeg diwezhañ war-lerc'h ar re zo bet abaoe un nebeut bloavezhioù, a ziskouez eo diazezet mat an tu kleiz bremañ e Breizh, pa ya war gil bepred ar PCF ha ne ya ket war-raok an tu kleiz pellañ. Araakadennoù an tu kleiz zo re ar PS. Met abaoe nebeut, hag en dro-mañ, abalamour da zislavarioù ar P.S. moarvat, e weler o vont war-raok e lec'hioù zo an ekolojisted pe ar re a ya dindan ar skritell-se, ar PSU e kornioù zo hag an UDB, d'an nebeutañ e-lec'h ma vezont anavezet war an dachenn evel tud gouest da ginnig ur politikerezh nevez d'o c'henvroiz. Met, eveljust, dav e vo gortoz c'hoazh, hag en un doare ispisial, an dilennadeg-rannvro evit barn en un doare suroc'h.

Tangi Louarn.

Plas evit ur politikerezh all e Breizh

Daoust ne oant ket a-du gant ar politikerezh a-vremañ, n'eo ket aet gwall niverus tud ar c'harterioù poblek da reiñ o mouezhioù d'an tu kleiz pellañ : "La Voix des Travailleurs" e Brest gant an L.C.R. hag ar P.S.U. asamblez n'he deus bet nemet 2,1 % eus ar mouezhioù. Sur a-walc'h n'o deus ket an dud re a fiziañs enno evit kaout un diskoulm d'o c'hudennoù. Er c'hontrol trec'h an tu kleiz e FOUJERA zo deut a-druga-



all (e Roazon ne vo nemet ur c'huzulier e-



Iffig Remond - Maer Sant HERNIN

Sant HERNIN, ur bourk e kichen Karaez. Tro gentañ ar votadeg-parrez n'eus nemet un den a zo bet dilennet. Ret eo lavaret e oa teir listenn a glaske rastellañ ar mouezhioù. Div listenn evit an tu-dehou hag unan evit an tu-kleiz. Da gentañ-penn

eta e voe dilennet Yves Remond. Ar maer kozh, Leon Manac'h, a oa pellik a-walc'h war e lerc'h. Tud listenn an tu-kleiz renet gant paotr UDB, Yves Remond, a oa lec'hiet mat e mod all.

War listenn an tu-

SANT HERNIN:

kleiz e kaver anv un den anavezet mat e Breizh. Paotr al levrioù, paotr Diaouled ar Menez, Yann Goasdoue.

An eil gwech e voe sklaeroc'h. An tu-kleiz a lakas e-barzh trizek den diwar bemek. Yves Remond a c'helle gwelout dorioù an ti-kêr digorfrank dezhañ. Leon Manac'h, maer abaoe 1952, n'en doa ket bet c'hoant kenderc'hel goude an dro gentañ.

En UDB emañ Yves Remond abaoe 1975, hag e penn kevredad Kreiz

SANT PATRON AN U.D.B.

Breizh ar strollad abaoe miz Mae. Degemerus, tost tre ouzh an dud, brezhoneger, n'eo ket unan eus ar re a vez dilennet peogwir e vezont degemeret war ul listenn eus an tu-kleiz, anv UDB peget war o chupenn. Savet en deus Y. Remond e listenn, kemeret en deus ar penn, ha bet eo bet dilennet diouztu ! Pa ouzer mat peseurt mod e vez graet politikerezh en ur bourk bihan e-giz Sant HERNIN, e c'heller lavaret en deus labourer kalz war an dachenn, bloavezhioù ha bloavezhioù. Bep daou viz e

lake da zont er-maez ur gazetenn "Kost ar min". Aze 'veze kavet kement a c'hoarveze e Sant HERNIN, Spezet hag e div gumun all.

A-du pe get gant an UDB, e c'heller lavaret ez eo Yves Remond ur skouer evit an holl re a zo o stourm evit pobl Vreizh. Kregiñ a ra al labour evit ar maer nevez hag evit re e listenn. Ur wech bennak all moarvat, e vo komzet eus se gantañ.

Charlie Grall

ANNA VREIZH

sed a zispieg an amzer zo bet etre trec'hadenn SANT-ALBIN e 1488 ha feur-englev 1532.

Gwelout a reer ur vrogarantez wirion dija d'an ampoent-se. Ma oa noblañsed oc'h irienniñ gant renerien Bro-C'hall e weler ivez reoù all (ha ne oant ket Bretoned), o tifenn ar vro, evel Frañsez II da skouer. Ur souezh ivez, evit un den a-vremañ, gwelout peizanted Vreizh-Izel o sevel a-viliadoù evit mont da zieubiñ Naoned eus krabanou ar C'hallaoued. Unan eus ar fedoù n'eo ket bet lakaet ar pouez warnañ kement-se, betek-henn, eo kresk galloud ar vourc'hizien gant an ekonomiezh hag ar c'henerzh o-vont en-dro. Marteze abalamour n'int ket deut a-benn, er fin, da sevel ur vourc'hizelezh vroadel. Amañ e tiskouezzer roll Pierre LANDAIS, bourc'hiz eus GWITREG hag arc'hantour meur an dugelezh (ministr an arc'hant er mare) ha kuzulier Frañsez II. Eñ an hini eo moarvat, a zo bet e gwirionez, e penn ar Vrc e-pad ur 25 bloavezh bennak hag en deus klasket sevel e Breizh ur stad vodern. War bouez nebeut eo bet c'hwitet marteze. Dizunvaniezh ar Vretoned he deus kaset anezho da vezañ trec'het e Sant Albin e 1488, ha ne oa mui da c'houde ar frankiz politikel evit kenderc'hel gant an hent -se.

Anna Vreizh, hi zo bet desavet e karantez he Bro hag ar sevenadur, an arz. Brezhoneg a ouie, desket ma oa bet gant ur vagerezh a Vreizh-Izel. Skiant ar stad hag ar politikerezh a oa bet roet dezhi. Atav he devo klasket mirout frankiz politikel Breizh kement ha ma c'hello, zoken pa vo bet rouanez Bro-C'hall.

Setu ul levr plijus kenañ, hag a c'hell klokaat en un doare talvoudus levrioù diazezh evel istor Breizh Skol Vreizh (2) da skouer.

Tangi Louarn.

(1) "Anne de Bretagne" Jean Markale - Hachette Littérature 1980.

(2) Embannadurioù "Skol Vreizh" - e Montroulez.

Boaz eur da zisfizout pa 'z eus kaoz eus levrioù Jean MARKALE, ha da soñjal e vo kavet e-barzh ijin ar skrivagner kentoc'h eget ar fedoù reizh. Al levr "Anne de Bretagne" (1) a lenner e gwirionez ken aes hag ur romant ha gant kement a blijadur. Koulskoude n'eo ket faltazi glan daoust d'ar sell personel a daol an istorour ouzh an darvoudoù hag an dud.

Skrivañ a ra Jean MARKALE e-unan e-barzh ar raklavar: "Faos e vo bepred an deskivadur, peogwir e vo oberenn ur skrivagner na c'hello ket mirout, daoust da bep tra, da deurel e soñjoù-eh, pa n'eo ket e huñvreoù, war al leurenn a zo dirazañ". Pelloc'h e lavar c'hoazh: "An tudennoù a gejom ganto en Istor, a glaskomp lakaat da vevañ dirazomp evel tud a anavezomp, daoust hag ez eus anezho e gwirionez? Daoust ha n'int ket kentoc'h e-giz emaoomp o c'hortoz? Neuze n'eus ket kalz muoc'h a ziforc'h etrezo hag harozed ar romantou".

Daoust da-se e c'heller lavarout en deus taolet ar skrivagner ur sell pizh ouzh an darvoudoù, an dud, ar gevredigezh. Klask a ra kompren tro-spered tud ar mare evit displegañ gwelloc'h o emzalc'hoù. Deskrivañ a ra ar gevredigezh, hec'h emdroadur diouzh un tu, tra ma lak da vevañ enni, diouzh un tu all, tudennoù bev ha ma aesa kompren o dibaboù, o soñjoù, o huñvreoù donañ mard eo posubl, o flanedenn.

Anna Vreizh zo un digarez da studiañ ur prantad, anavezet fall a-walc'h a-benn ar fin, eus istor Breizh. Ema Breizh bepred etre an emglev gant Bro-C'hall ha gant Bro Saoz. Met er memes amzer e weler Roue Bro-C'hall o reiñ levedoù da noblañsed Vreizh, o tizezañ ur rouedad spierien evit evezhiañ renerien an dugelezh. Ur stad dizalc'h e chom Breizh avat war dachenn al lezenn, ha klask a re renerien Bro-C'hall kenstagañ anezhi war ziazezh ar gwir, ha pa vefent bet trec'h dre ar brezel:



c'het kont anezho gant ar sindikadoù e c'hellor bodañ muoc'h a dud ha bezañ efedusoc'h. Met kalz da c'hounit o deus ivez ar strolladoù a stourm evit gwirioù ar rannvroioù en ur zerc'hell kont eus-stourm ar sindikadoù; ne c'heller ket en em gannañ nemet evit ar sevenadur; kalz ledanoc'h eo ar gudenn. Krouiñ ur stad all, distag diouzh hini Bro-Frañs ne vefe ket un diskoulm; dav eo lakaat an holl labourerien da stourm a-gevret evit difenn gwirioù ar rannvroioù, evit bezañ mestr en o bro, evit gellout evit gwir "Bevañ ha Labourat er Vro".

Setu ar pezh a zo displeget gant Michel Tozzi. Marteze ne vo ket an holl a-du gant e venizioù. Posubl e vefe bet ivez mont pelloc'h war dachennoù 'zo: da skouer, diwar-benn ar sindikadoù a zo bet (pe a vije) krouet e le-c'hioù 'zo, distag diouzh re Vro-Frañs. Talvoudus eo koulskoude lenn al levr evit mont pelloc'h er preder.

Div lodenn all a zo ivez. Unan diwar-benn ar wregedezh, ma vez displeget enni perak eo renet ar sindikadoù dreist-holl gant gwazed. Dav eo d'ar sindikadoù difenn gwelloc'h gwirioù ar maouezed. N'eo ket en ur stourm a-eneb d'ar wazed e vo diskoulmet kudennoù ar merc'hed. Dav eo pouezañ war an gevredigezh, war an ekonomiezh ha war ar sindikadoù o-unan evit kaout ur bed kemesket gant kement a wirioù evit an maouezed hag evit ar wazed.

Al lodenn diwezhañ a gomz eus an ekologiezh, a zo un dra nevez a-walc'h ha disheñvel ivez diouzh ar sindikadoù. Ret eo dezho en em c'houlenn pesunt pal eo hini ar ehonaniezh, petra a rankef fardañ evit ur vuhez blijus er bed a-bezh ha n'eo ket evit gounit muoc'h a arc'hant en ur zistruzh ar bed. N'eo ket en ur vont d'en em gizhat o sevel dedivad pe c'hivri e vo respontet d'ar goulennoù-mañ, met en ur stourm gant (pe e-barzh) ar sindikadoù evit ur sindikadelezh c'hlas ha ruz.

Mat e vefe bet marteze, prederiañ er memes tro war ar teir dachenn, met un dra a zo sur: kalz o deus ar sindikadoù hag ar sokialegezh da c'hounit en ur zerc'hell stad eus ar rannvroiezh, eus ar wregedezh hag an ekologiezh.

Ives Jardin.

SYNDICALISME & NOUVEAUX MOUVEMENTS SOCIAUX

Régionalisme, Féminisme, Ecologie



Collection "social en mouvement"

LES ÉDITIONS OUVRIÈRES

-Sindikadelezh hag ensavioù kevredadel nevez: Rannvroiezh, Gwregedezh, Ekologiezh.

Skrivet eo bet al levr-mañ gant un Okitan a ra war-dro sindikad C.F.D.T an "Aude" ha war-dro ar S.G.E.N. evit Bro Lengadoc ha Katalonia an Hanternoz. Stourm a ra evit yezh ha sevenadur e vro kenkouzh hag evit hec'h ekonomiezh. Traoù en deus kinniget d'e sindikad diwar-benn an dud divroet ha diwar-benn ar rannvroeladur en deskadurezh.

N'en deus ket skrivet e levr en okitaneg, evit gellout bezañ degermeret gant tud Bro-Frañs a-bezh hag ar pezh a zo bet skrivet diwar-benn ar rannvroiezh a zo ken talvoudus evit ar Vretoned hag evit an Okitaned (un tammig disheñvel eo marteze ar c'hudennoù e Bro-Elzas).

Ne c'hell ket ar sindikadoù chom hep anavezout pal ar rannvroiezh a zo heñvel-tre ouzh hini ur c'hevredad sokialour hag emren. Met dav eo anzav evit gwir e vez lezet re alies ar rannvroiezh a-gostez gant ar sindikadoù.

N'int ket bet savet war ar memes diazezoù. Frammet eo ar sindikadoù en un doare c'hwec'hkonek. Kreizennet int ha galloudusoc'h eo ar c'hevredoù broadel eget ar rannvroioù.

Ret e vez alies-tre d'ar sindikadoù enebioù ouzh ar Stad, pe mont da gomz gant an dud a zo e penn evit gounit muoc'h a draoù:kudennoù a-bouez (an dra-se a dalv kudennoù broadel) a vez diskoulmet pe studiet e Pariz; kudennoù ar rannvroioù n'int ket gwall bouezus!

Evit kemmañ an traoù e ranke krouiñ frammoù rannvroel en ur reiñ dezho kalz muoc'h a c'halloud: "ur sindikad, a fell dezhañ sevel an emrenerezh, ne c'hell ket bezañ kreizennour, nag en e frammoù, nag en e zoare-ober".

Bez e vo komprenet gwelloc'h ar c'hudennoù gant ar sindikadoù, ma selaouont an dud a zifenn gwirioù ar rannvroioù: gwirioù ekonomikel broioù mac'homet, gwirioù politikel rannvroioù gwasket, gwirioù sevenadurioù a zo en arvar da vont da get. Ma vez dal-

GWENED PE GWENNVED an tu-dehou

Tremenet ar votadeg ha gwenn eo chomet Gwened. Ouzhpenn-se, ar maer nevez a zo aet gantañ muoc'h a vouezhoù evit ar maer kozh. Mouezhoù tapet diwar gant an tu kleiz eveljust.

Met memestra un trefde listenn, "Gwened arall", oa deut da blantañ he fri e-barzh ar jeu: ekologourien ha tud eus ar c'henseurtiezhioù en o zouesk. Hag en diwezh 56% zo aet gant ar re wenn, 36% gant ar re ruz ha tost da 8% gant ar re c'hlas (unan diouto anvet da guzulier).

Eveljust, rebechet d'ar re c'hlas gant ar re ruz bezañ laeret diganto mouezhoù prizioù: gwelet eo bet an tu-dehou bezañ trec'h e Kergadoù, unan eus karterioù ar vicherourien.

An tu-kleiz amañ ne vez klevet kaoz diouto nemet bep c'hwec'h vloaz.

Traoù iskis a verzer ivez: diskoachet eo bet dre vuzhuz daou MRG n'ouvezet ket pelec'h, ha lakaet anezhe araok reoù UDB, bev-mat hag anavezet mat e Gwened.

Problemoù e-leizh koulskoude a zo dre amañ -an dilabour o kreskiñ

bepred muoc'h, an amre o vont da vezañ sotoc'h-sotañ, hor c'hultur folklorachet,...

Soñjal a raer ez eo afer ar skolioù prevez en deus kreñvaet an tu-dehou e Gwened ha lakaet a-nevez Sine ha Pondivi dindan e zalc'h.

A-du-arall eo bet souezhet an dud o welet tost da 40% mont gant ar PS e Ploermeil, k'erbenn Bro-Gwened gwenn, deut an tamm ruz dezhi evit ar wech kentañ: an implijoù kollet e labouradeg Sant-Armel a zo kaoz e-michañs.

Herve ar Bihan

KEMBRE

War-oro kant a dud a oa deut da Aberystwyth, d'ar Sadorn 5 a viz C'hwevrer, da lidañ ugentvet deiz-ha-bloaz manifestadeg gentañ Cyndeithas yr Iaith Gymraeg, bet graet war bont Trefechan d'an eil a viz C'hwevrer 1963, pa oa bet miret ouzh ar c'hirri da dremen gant un tregont bennek a vanifesterien azezet war an hent, e-kreiz ar pont. Dindan ar glav hag ar c'hazarc'h o deus selaouet manifesterien 1983 un nebeut prezegennoù gant Gwilym Tudur, unan eus ar baotred a oa aze e 1963, Wayne Williams, bet kadoriad Cyndeithas yr Iaith, Angharad Tomos, kadoriad ar bloaz-mañ, a-raok kaout bep a damm gwastell, gwastell an deiz-ha-bloaz. En derc'hent e oa bet lakaet ur blakenn war ar pont da gounañ manifestadeg 1963, met e-pad an noz e oa bet tennet kuit... gant. mignoned d'ar c'hembraeg, sur a-walc'h.



20 VLOAZ ZO!

E 1980 e voe gounezet ar chadenn skinwel gembraek. Hag etre pep hini eus an trec'hioù meur-se, trec'hioù all bihanoc'h, ur bern manifestadegoù, tud dirak al lezioù-barn, tud en toull-bac'h...

Kement-se ne dalvez ket eveljust ez eo echu ar stourm. Labour a chom d'ober c'hoazh evit ma vefe ar gwir gant pep kembread(ez) d'ober gant (h)e yezh dirak ar servioù ofisiel. E miz Here 1982 he deus embannet Cyndeithas yr Iaith hec'h eil "Manifesto" (dek vloaz zo e oa bet embannet an hini kentañ). Ennañ e tispieg ar Gevredigezh penaos e wel he dazont. Dek vloaz 'zo e veze pouezet kalz war statud ar yezh ha war ar yoc'h-stlenn (mass-media), eme ar "Manifesto". Bremañ e vo pouezet muoc'h war ar framm ekonomikel ha so-

kial a zo ret kaout evit ma vefe ar gumuniezhad tud a gomz kembraeg.

Setu perak ez eus bet roet lañs d'ur stourm da c'hounit ul "Lezenn yezh nevez", hini 1967 n'eo ket a-walc'h. Ar bloaz-mañ ivez e vo goulennet ma ve dalc'het kont eus ar yezh pa gemerer divizoù evit diorren buhez ekonomikel ar c'humuniezhoù kembraek, er C'hornog hag en Hanternoz (greantelezh, touristelezh, hag all...). E 1983 ivez e vo pouezet war an Deskadurezh, o c'houlenn ma c'hellfe pep bugel e Kembre kaout e zeskadurezh e kembraeg. Ha siwazh ez eur pell eus an dra-se c'hoazh.*

Iwan Kadored

* E Breizh omp pelloc'h c'hoazh (Notenn gant ar skipailh).



EN UR LENN

Niv. 1 - 6 a viz Genver 1983.

Emañ al loialisted (lealien) (ar re a chom feal da v-Bro-Saoz oc'h sozañ ur raktres evit lodennañ un tammig muoc'h c'hoazh, ma vez ezhoenn, douar an enezenn. Ma talc'h ar Republikaned da c'hounit mouezhoù da vare an dilennadegoù da zont, e vo klasket troc'hañ an Ulster(1) e div vro nevez, unan evit pep kostezenn ! Un doare ha n'eo ket nevez, e Bro-Iwerzhon, da ziluziañ kudennoù 'zo ! Ar Republikaned ne c'hellont ket asantiñ mont war an hent-se, evel just. Setu ar pezh a zo lavaret krenn ha krak war bajenn gentañ niverenn "AN PHOBLACHT" evit ar bloaz.

bloaz : Eamon "Bronco" Bradley, d'ar 25 a viz Eost, ha tri all : Gervais McKerr, Eugene Toman ha Sean Burns d'an 11 a viz Du.

- Ar vuhez foran he deus dalc'het da vont war fallaat, dreist-holl er c'hêrioù : furchadennoù, enklaskoù, gwaskadurioù a-bep-seurt renet gant soudarded saoz, hep digare ebet zoken alies.

- Hag, evel e lec'h all, an enkadenn ekonomikel, kalz gwashoc'h c'hoazh e Bro-Iwerzhon eget e broioù all Europa, koulz en eil tu hag egile eus an harzoù, er 26 kontelezh (Eire : Stad Dieub) hag er 6 kontelezh (Ulster).



Niv. 2 - 13 a viz Genver.

- Klevout a reer komz muoc'h-mui eus dilennadeg nevez er vro a-raok penn divezhañ ar bloaz-mañ. Koulskoude e c'hellfe an Itron Thatcher gortoz betek nevez-amzer 84, ma karfe. Lavarout a reer he defe c'hoant d'ober he mad eus ar brud nevez tapet ganti da vare brezel Inizi Sant Malo. E ken kaz ma c'hoarvezfe ar vouezhiadeg prim a-walc'h bremañ, eo krog ar Sinn-Fein d'he frientiñ da vat, war lañs disoc'hoù di-c'hortoz c'hoarvezet warlene.

- Krog eo, e Belfast, unan eus brasañ prozezioù ar bloavezhioù-mañ. 38 a vroadelourien a zo bet lakaet war o choug war-dro 184 a dorfedoù eus ar re euzhusañ : bezañ izili eus an I.R.A. ; bezañ lakaet bombezennoù da darzhañ, klasket tennañ war soudarded saoz, roet bod da dud klasket gant an archeerien... An tamalloù a zo bet graet gant ur flatrer :

Christopher Black, hag a lavar bezañ bet un c'zel oberiant eus an I.R.A.. Harzet e oa bet 15 miz 'zo gant ar R.U.C. ; hag abaoe ne oa bet gwelet gant den ebet, nemet gant ar re-mañ evel just. Lavarout a reer edo o vevañ e lec'h all abaoe, e Bro-Ganada pe e Bro-Aostralia marteze, gant an arc'hant paket gantañ da heul e drubarderezh.

Distroet eo da v-Belfast evit ar varnedigezh, met hep bezañ kejet gant den ebet, nag e dad, nag e vamm, na den all ebet. E dud o deus klasket, abaoe 15 miz, kejañ outañ, met hep dont a-benn.

E penn kentañ an divizoù, e sal ar prosez endeeun, mamm Black he deus huchet dezhañ : "Ezhoenn eus da gaoc'al dit !" Ha petra a zo c'hoarvezet, a gav deoc'h ? Diouztu eo bet kaset kuit Black gant an archeerien, hag e dud a zo bet lavaret dezho e oa gwelloc'h chom sioul, a-hend-all e veffent kondaonet da 2 vloavezh toull-bac'h !

Moarvat eo aet an traoù pell a-walc'h bremañ, hag e kendalc'ho ar prosez, gant Black evel test-tamall kentañ. Salv dezhañ bezañ kuzhet mat, war-lerc'h ar varnedigezh !

AR BED Keltiek
Kempap
2, Straed ar Roue Gralon
STAL LEVRIOÙ
PLADENNOÙ
ARTIZANELEZH
SAL DISKOUZ TAOLENNOÙ

An Phoblacht REPUBLICAN NEWS



- Keleier brezel. 2 ezel eus an R.U.C. a zo bet diskaret, hag unan all a zo bet gloazet e-kerz ar sizhun-mañ. Teir cagadenn all a zo bet kaset da benn, a-enep tud an R.U.C. hag an U.D.R.(6), ha tri a dud a zo bet gloazet ouzhpenn. N'haller ket ankounac'haat evit kelou-se ar 5 broadelour lac'het e-kerz miz Kerzu gant ar Saozon : 3 eus an I.R.A. ha 2 eus an I.N.L.A (7).

- In memoriam. Bep sizhun e vez lennet er rumad-mañ pennadoù da reiñ soñj eus ar stourmerien aet da anaon abalamour d'ar brezel. A soñjo pep hini ar pesh a garo, ne c'heller ket chom disoblant he digas pa lenner un dra bennak evel ar pennad-mañ :

Delaney Kevin (3et deiz-ha-bloaz). Gant loc'h ha kasantez e eoomp soñj eus memor ma den hez hag hon tad, Vol.18) Kevin Delaney, lac'het o kas e deiz da benn, d'ar 17 a viz Genver 1980. Kerse ha soñj da viken dezhañ a-bep e weeg, e vab Sean hag e veac'h Cairn. 10, 20 ha muioc'h eus seurt keennadennoù a vez embannet e pep niverenn ar gelaouenn. Ha c'hwi a soñj deoc'h e c'hell c'hoazh ar vroadelourien ankounac'haat stourmoù ha strivoù ar bloavezhioù tremenet ?



Niv. 3 - 20 a viz Genver.

- Netra nevez dindan an heol. Emañ Iwerzhoniz o tiskoañ er eus to da selau ar pesh eus o lavarout er pellgomter. Er Vro Dieub an hini eo tarzhet ar pesh skandal-mañ, a daol disfis war an div gostezenn bolitikel : Fine Gael (dehouik sañset), a zo bremañ e penn ar stad, ha Fianna Fail (broadelourik ... sañset). Tro da dud ar Sinn-Fein da ziskouez n'eo ket disheñvel-tre an div gostezenn, hag ez eus lec'h er vro a-bep evit un drede, broadelour hag a-gleiz war un dro.

- Er sizhun-mañ e roer da c'houzout ivez n'eo ket sikouret kalz ar vroadelourien gant pennoù bras an Iliis. Ar re-mañ a ya kalz buanoc'h da gondaonid taolioù an I.R.A. eget re an R.U.C. hag an U.D.R.. Setu dres ar pesh a zo c'hoarvezet goude ma vefe bet diskaret ar barner William Boyle gant an I.R.A. e Rostrevor (Co. Down) d'ar 16 a viz Genver. Ur c'hatolik a oa anezhañ, set

vez 'e oa o labourat diouzh un enebourien. E diavaez d'ar c'hondaonidigezhioù boas, eo bet ret d'an arc'heskob Cathal Daly lakaat e vouezh a-unvan gant re al loialisted. Ne oa ket bet klevet kemend-all eus e berzh pa oa bet lac'het 3 ezel eus an I.R.A., ur miz 'zo.

- Kenderc'hel a ra prosez an dud diskuliet gant Christopher Black, met ne ya ket buan-tre an traoù war-raok. Mamm hemañ, hag a glask atav komz outañ, eo bet ret kas anezhi d'an ospital abalamour d'un taol-kalon dic'hortoz. Daoust hag e teuo e vab d'he gwelout ar wech-mañ ?

A-hend-all e kendalc'h Black da ziskouez e berzhioù mat. O klevout anezhañ, n'en defe graet netra vat e-kerz ar mare ma oa "oberiant" en I.R.A.. Bep gwech m'en deus bet ur fuzuilh pe ur bistolenn etre e zaouarn, an defe c'hwitet e balioù ! Ar pesh a laka an hini a skriv ar pennad da lavarout en deus kavet bremañ, da vihanañ, un dra bennak hag a oar ober en un doare dispar : kontañ kaozioù !

- Pajenn greiz ar gelaouenn, a vez alies enni danevelloù pe studiadennoù hiroc'h eget ar pennadoù all, a zo gouestlet ar wech-mañ da gantved ganedigezh Sean McDiarmada, a vez graet dioutañ "aerz emsavadeg 1916".

Sean McDiarmada a zo gant war-dro ar 26 a viz Genver 1883, en un tiegezh a dud paour a vro Leitrim. Anavezet en deus ar mare ma vez taollet an dud paour er-maez eus o menaj, pa ne chome ket arc'hant a-walc'h ganto evit pacañ o Gouel-Mikael. An darvoudoù-mañ a lakao anezhañ da soñjal e vo ret da gentañ kas ar berr-benned hag an noblañsoù saoz er-maez eus Iwerzhon a-raok huñvreal e mann all ebet.

Anavezout a rae mat yezh e vro, ha chom a raio feal deshi betek e varv.

Kemer a raio persh, gant e dad, en I.R.B.(9), ha dont a raio zoken da vesañ unan eus azerien ha diazererien ar gevredigezh.

Er-maez eus al labour-kuzh-mañ, e raio ivez war-dro Sinn-Fein ar mare-se.

Kemer a raio persh, kouls lavarout, en holl stourmoù adalek penn kentañ ar c'hantved, hag, adalek 1913, e soursio ouzhpenn eus arme ar "Volontez", a oa o paouez bezañ savet. Eñ eo en devo bet an enor da lakaat Patrick Pearse e penn unan eus kevrennoù ar "Volontez".

Pep hini a oar penaos eo tremenet emsavadeg Lun Fask 1916, ha penaos eo bet mouget er gwad a-benn ar fin.

Sean McDiarmada a vo bet unan eus ar re o devo sinet ar galv d'an emsavadeg, hag abalamour da se e vo unan eus ar re gentañ da vesañ kondonet d'ar marv. Fuzuilhet eo bet e porzh bihan toull-bac'h Kilmahnam, e Dulenn, da 4 eur nemet kard, d'an 12 a viz Mae 1916, er memes deiz ha James Connolly.

- D'an 30 a viz Genver 72 e oa bet lac'het 14 a dud gant ar soudarded saoz e-kerz ur vanifestadeg aozet evit difenn gwirioù mab-den. 14 den ouzhpenn a oa bet gloazet bras, hag unan anezho, chomet klañv abaoe, a zezrevell penaos e oa tremenet an traoù neuze. Anat eo hiziv o doa bet aon ar Saozon rak an engroez, met ne oa koulskoude arvar ebet evito p'oa doa kroget da dennañ n'eus forzh pelec'h, evit gwareziñ n'ouzer ket c'hoazh petra. Bep bloaz e vez kounet an deiz-se gant ar vroadelourien, ha bewech e vez aon e c'hoarvezfe un dra bennak heñvel.

14 gweznenn a zo bet plantet en devezhioù-mañ e Derry da eñvor ar 14 paour kaezh den lac'het didruez. Klaouestre ne zeuit ket holl da vountañ uhel ! Ar seurt "arouezioù" ne blijont ket kalz d'an arme saoz. Met, piv 'oar ? An tamm mogerenn skrivet warni "Bremañ emaoch o tont e-barzh Derry dieub" a zo chomet en he sav betekhen, daoust ma 'z eus bet klasket diskar anezhi meur a wech er bloavezhioù tremenet. Tud Derry, int, a blij an aouezioù desho !

"Amnesty International" ha Priz Nobel ar Peoc'h.

An oberenn-mañ a raio moarvat tro ar Bed. Evit-se en doa Bobby Sands skrivet anezhi !



(1) Ulster : Iwerzhon an Norzh (6 kontelezh), Uladh, en Iwerzhoneg. Ar Stad Dieub : Republik Iwerzhon (26 kontelezh), Eire en Iwerzhoneg.

(2) Sinn-Fein : "Ni hon unan" en Iwerzhoneg. Peurvuiañ e vez komzet eus ar Sinn-Fein evel eus kostezenn bolitikel an I.R.A.

(3) M.P. : Member of the Parliament, ezel eus ar Breujoù Broadel (Saoz !).

(4) R.U.C. : Royal Ulster Constabulary : Archerien an Ulster.

(5) U.V.F. : Ulster Volunteer Force : ur strollad lakaet war droad evit tagañ ar vroadelourien.

(6) U.D.R. : Ulster Defence Regiment : soudarded a youl vat evit difenn an Ulster.

(7) I.N.L.A. : Irish National Liberation Army : arme kuzh, eus an tu kleiz pellañ, alies taeroc'h eget an I.R.A.

(8) Volontez : ezel eus an I.R.A.

(9) I.R.B. : Irish Republican Brotherhood : Breurietzh ar Republikaned Iwerzhonat. Kevredigezh kuzh a zo tremenet enni al lodenn vrasañ eus Em-saverien Iwerzhon eus derou ar c'hantved betek 1916.



En e lizher diwezhañ e skriv : "Mervel a ran evit ma c'hello bevañ Bro-Iwerzhon". Daoust hag eo deuet da wir huñvre Sean McDiarmada ?



Niv. 4 - 27 a viz Genver.

Daou dra e pajenn gentañ "An Phoblacht" ar sizhun-mañ : emdroadur ar vuhez politikel er "Stad Dieub", ha kelou eus "Bloody Sunday" 1972 (Skuilhadeg gwad an 30 a viz Genver 1972).

Emañ Charles Haughey war-nes kuitaat penn ar Fianna Fail, goude bezañ bet kollet penn ar gouarnamant da heul ar votadeg diwezhañ. Netra da lavarout, eme ar gelaouenn. Evel-se emañ lezenn an demokratelezh. Met arabat ankounac'haat o oa bet barnet Haughey, un toullad bloavezhioù 'zo, goude bezañ bet tamallet dezhañ bezañ unan eus pourvezerien armoù an I.R.A.. Anat eo n'eo ket bet ankounac'haat an dra-mañ gant ar Sinn-Fein, gwir pe diwir e vefe bet an tasall.

Emañ unan eus ties-embann ar Stad Dieub o paouez lakaat da zont er-maez levr diwezhañ Bobby Sands : "Un deiz e-kerz ma buhez". Skrivet eo bet gentañ, war baper-reor, nac'het e oa bet reiñ paper all dezhañ gant ar Saozon, e-kerz e hars-debriñ en toull-bac'h, un nebeut deizioù hepken a-raok e varv. Diskouezet e vez ennañ an doareoù implijet evit gwaskañ ar vroadelourien, ha klask frikañ spered o stourm a-benn ar fin. Digoradur al levr a zo gant Sean McBride, diazezerour

evit anaout
gwelloc'h Iwerzhon
«IRLANDE LIBRE»
KELEIER MIZIEK
174 Keller 75011 Paris
KOUMANANT
60 lur war anv A. MONOT

TRO BREIZH

SINEMA E KARAEZ



Dek vloaz 'zo ne vije ket bet lakaet kalz a arc'hant evit sevel ur sinema nevez e kreiz Breizh.

e-barzh, azezet mat war gadorioù-brec'h arnevez, ha blot.Tommet mat e vez ar sal e-pad ar goañv,ne vefe ket kavet gwelloc'h e Kemper d'an meno !

30 000 den 'zo deut d'ar sine e-korf 9 miz. Ur bern tud eus Karaez, eveljust, met tud all ivez a zo o chom er parrezioù tro-war-dro. Filmoù a-bep seurt a vez kinniget d'an dud. "Danton", savet gant Wajda, "Travail noir",gant Jerzy Skolimowski.

-Graet e veze war-dro ar "sine-club"-a-raok met ne deue ket ur bern tud abalamour d'ar sal a oa tristrik a-walc'h moarvat (yen 'oa, ne oa ket brav deoc'h chom azezet pell war gadorioù kozh-noe).Ne oa ket plijus bezañ e-barzh tamm ebet, hag ar filmoù ne oant ket evit an holl, filmoù mat-tre peurlieusañ met siwazh ne lakaent ket tud Karaez da zont !

-Bremañ eo cheñchet penn d'ar vazh : ur gevredigezh a zo bet krouet, "Contrechamp" hec'h anv. Gant asant ha sinadur ar maer evit kaout argant, zo bet kempennet ur sal. Brav eo bezañ

Eveljust, e ranker kinnig filmoù dister a-wechoù, gant A.Delon hag all, met dav eo kaout boued evit an holl, ha ret eo anzav, eo e-giz-se e vez leuniet ar sal. An dud zo boazet da zont bremañ. An dra-se ne oa ket gwir gant ar "sine-club".

Un den a vez implijet bremañ evit ober al labour. E mod all e vez

graet al labour gant tud a youl vat : gwerzhañ an tikiji (hag ar madigoù), troc'hañ an tikiji, di-wall ar sal e-pad an abadenn, naetaat ar sal. Ret eo kaout tri den evit pep abadenn (ouzh-penn ar paotr gopret)hag an dra-se 'vez graet dek gwech bep sizhun gant izili ar gevredigezh"Contrechamp".

Eveljust ne chomo ket an traoù e-giz-se. Menozioù all zo c'hoazh: sevel ur bank gant bin-viji ha mekanikoù arnevez (magnetoskop hag all ...) a vefe feurmet d'ar c'hevredigezhioù all, mont e-barzh ar skolioù e Karaez ha tro dro da ziskouez filmoù ha dedennañ ar re yaouank.

E-kreiz ur vro a zo o vervel tamm ha tamm e tiskouez deomp "Contrechamp" pezh a c'heller ober gant ur gevredigezh 1901, en ur vont kuit eus ar "getto sevenadurel". Tu a vije bet d'ar skipailh a rae war dro ar "sine-club" kenderc'hel e-giz gwechall,kaout plijadur kenetrezo, pempzek arvester er sal o sellout ouzh ur film mat.

-Un dra all da vezañ lakaet war gont"Contrechamp" : sikour a rario Jean Kergrist evit sevel e film divyezhek. Spi 'm eus e vo kinniget d'ar Vretoned e Karaez da gentañ-penn.

Charlie Grall.

GOUREN 1983



Bodadeg Gourenerien ar FALSAB (Fédération Autonome (?) des Sports Athlétiques Bretons) a c'houlenn digant ar gouarnamant, da larout eo digant Ministrerezh ar Sportoù, bezañ anavezet evel renerzh ha mererezh ar Gouren evit Breizh ha Bro-C'hall. Pelota Bro-Euskadi a vez renet a-walc'h eus Baiona.

evit Bodadeg ar Gourenerien, kaout ar gwir da resev yalc'hadou, labourat gant an Deskadurezh, da lavaret eo bezañ sportourien evel ar re all, en ur chom mestr war ar Gouren.

Ar Judo a oa gwechall dindan an FFL a zo breman distag. Heñvel dra a c'houlenn eta ar FALSAB.

Ha nann a zo bet respontet e miz Mae hag e miz Gwengolo 1982, d'ar Peñseg da gentañ, da Beuziat Goude, gant Ministrerezh ar Sportoù, an Itron Edwige Avice.


Ha nann sdarre d'an 10 a viz Genver 1983 war ar "J.O." da c'houlenn kannad P.S. Douarnenez.

Mont a ra war-raok an digreizennañ.

*Ti ar C'hourenerien emeur o sevel e Berrien, a vo digor abenn an hañv. Gant ma vo skrivet an anv brezhonek war an ti...

Evit bremañ eo an FFL (Fédération Française de Lutte) an hini zo anavezet evel renerzh ar Gouren, hervez al lezenn, abaoe 1954. Er bloavezh-se e oa bet goulenet gant Gourenerien an USBP (Union Sportive des Bretons de Paris) mont e-barzh an FFL. Diwar-se e oa bet laketa ar Gouren dindan renerezh an FFL, hep goulen al li ar FALSAB, hag hep na vije bet goulenet digant an FFL, zo kaeroc'h. Abaoe 5 bloaz zo, bremañ, n'eus mui gourener ebet en FFL.

Bezañ anavezet gant ar gouarnamant a dalvez



zoken seurt emzalc'h digas e-keñver hor yezh ? Ne gav ket din.

a vo kavet en ti en div yezh.

Folklorel-rik eo chomet kealiadurezh (ideologiezh) B.A.S.. Labour dispar zo bet graet, dre vras, e-keñver sonerezh hogen pennoù bras B.A.S. n'o deus morse kinniget ur sell hollek war dazont hor sevenadur, n'o deus morse lec'hiet o labour er Stourm ouzh an Diseveniñ e Breizh.

Ha kemma a vo gant kadoriad nevez B.A.S., Martial Pezennec ?

Ma tichañs dezhañ klevout anv eus an tamm pennad-skrid dister-mañ e karjen en em soñje un tammig gant e vignoned war an doareoù eeun-mañ da ziskouez un tamm youl-vat a-fed hor yezh:

1 - Kavout un anv brezhonek da goñservatour an Oriant ha lakaat kement bomm skrivet

2 - Implijout an div yezh evit pep darempred gant an diavaez.

3 - Broudañ ar sonerien yaouank da zeskiñ brezhoneg ha sikour ar re a garfe brezhonegañ.

4 - Lakaat "Le Festival Interceltique de Lorient" da vezañ ivez "Gouel Etrekeltiek an Oriant" da lavarout eo lakaat da ren un divyezhezh klok e-kerz ar gouel.

5 - Kinnig d'ar re a fell dezho, deskiñ seniñ e brezhoneg, e Skol-Sonerezh an Oriant hag e-doug ar stajoù.

Setu 5 goulen a zo aes da seveniñ gant un tamm bolontez vat. Avel ha klemmichadennoù hon eus bet a-walc'h digant B.A.S. a-fed hor yezh, avat. Ha kemmañ a c'helllo ober B.A.S. ?

Olier ar Mogn

40vet deiz-ha-bloaz

BODADEG AR SONERIEEN

Nep piv bennak a glask "ober un dra bennak" evit ma vevo hor yezh a oar degas da soñj pegen kiriek da ziskar hon broadelezh eo ar Stad vac'hom hon gouarn a-c'houde pemp kant vloaz bennak. Ul lodenn eus an emsaverien kar-o-yezh a anzav ivez bep ar mare ez eus bet graet fazioù ganto pe gant kenemsaverien all (aesoc'h-a-se da anzav neuze, emit-hu, met n'eo ket evit kelou-se e ve faos ar varnadenn), Lies pennad emvann a zo bet embannet gant S.A.E., ar Falz pe Diwan... Yac'husat doare da labourat !



emzalc'h e-keñver hor yezh.

Siwazh ! ar preder war an advrezhonekaat a zo chomet sac'het a-bell zo e strolladoù all, bodet ganto miliadoù a Vretoned yaouank, koulskoude.

Tsolomp ur sellig 'ta ouzh Bodadeg ar Sonerien hag ouzh hec'h

B.A.S., e-giz ma oar an holl, a voe krouet 40 vloaz zo. He fal a oa adlañsañ sonerezh Breizh, en ur zegas doareoù nevez (ha binvioù nevez zoken) da seniñ. Ha deuet int a-benn. Ma ne vije ket bet B.A.S. ne vije ket kennebeut, en deiz-a-hiziv, eus ar re a asur deoc'h n'eus nemet ar sonerezh hengounel rik en deus un dalvoudegezh hag ez eo brizh-sonerezh labour ar bagadoù. Anzav kement-

mañ n'eo ket degemerout kement tra bet graet gant an diaraogourien, kompren un argerzh n'eo ken.

Ma, lonket he loaiaid mel gant B.A.S. e karjen bremañ gwelout penaos eo kiriek, da ziskar hor yezh.

Petra eo lec'h ar brezhoneg en aozadur B.A.S. ? Anv ar gazetenn "AR SONER", pozioù ar c'hanaouennoù ur wechig an amzer e-barzh. Hag implijet e vez hor yezh un tu bennak e B.A.S. ? Din da c'houzout, ne vez ket. Ar "c'hoñservatour deus Laoriañ" n'eus ket bet kavet penaos e vo lavaret se e brezhoneg ! Lec'h hor yezh e Gouelioù Etrekeltiek an Oriant ? Ur vezh ruz !

Ha sirius eo a-berzh B.A.S. bezañ e-touez ar strolladoù o embann bezañ a-du gant ar brezhoneg ? Ha kempoell eo

EMGANN : EVIT

AR FRANKIZ DA GOMZ

Sonj o deus marteze lennerien ar gazetenn eus Gouel an Distaoliadeg, an amnistiezh, aozet gant KAD (Kuzulioù an Distaoliadeg) e miz C'hwevrer 1981, evit skoazellañ prizonidi bolitikel Breizh. 15.000 a dud a oa bet neuze e Gwengamp. Ur gouel a feson, neke-ta ?

D'ar c'houlz-se ne oa ket aet c'hoazh Fañch Mitt e-barzh, ha ne oa bet diaezamant ebet gant KAD da gaout sal vras Kergozh. E-pad ar gouel, kudenn ebet. Ken e oa aet rener archerien Gwengamp da reiñ e c'hourc'hemennoù da aozerien ar gouel.

Deut an 10 a viz Mae. Ha dieubidigezh ar brizonidi. An darn vrasañ eus tud KAD zo aet da sevel "EMGANN" (a stourm evit an dieubidigezh vroadel hag ar soñjet o deus aozañ ur gouel bras all, e Gwengamp adarre : "Gouel ar pobloù o stourm", gant tud eus Euskadi, Korsika, Iwerzhon, hag all.

Ar wech-mañ avat,

eo bet nac'het reiñ sal vras Kergozh.

Gwelet eo bet maer (Leizour, PCF) ha kannad Gwengamp (Briand, PS), gant ar PSU, UDB, hag Emgann eveljust. Met mann d'ober.

Hervez Leizour ha Briand : e oa bet trubuilhoù e gouel KAD ; e oa sportoù d'an devezhioù dibabet evit ar gouel.

Hervez an Aotrounez ar Gag (Ijinour-kêr) ha Lucchesi (rener ar salioù), e oa dieub ar sal, d'an devezhioù-se (9 ha 10 a viz Ebrel).

An digarez zo bet roet neuze eo anv feuls ar strollad "Emgann". Koulskoude, kazetenn PSU 22 zo "Combat Socialiste", hag hini ar PS zo "Combat" !

Daoust da zifenne-rien Gwirioù Mab Den ar strolladoù gall, c'hoazh un tamm spi gant an aozerien da reiñ ar gomz d'ar pobloù o stourm evit o Frankiz. En ul lec'h all.

Erwan ar C'hoadig

BARNET ...

D'an 18 a viz Genver, e Sant Nazer, eo bet barnet Youenn Chaillou, unan eus daou brizoniad ar MIB toull-bac'het e Roazhon. Tennaet ar paotr eus e doull eta, da vont da welout e Vro-Naoned c'henidik, un den staget ouzh pep dorn, evel forzh peseurt kannad gwengampat (war-bouez o lifreoù, eveljust).

An abeg avat ne oa ket an hini e zalc'h en toull gant e gamarad Becheneg : diwezhatoc'h e vint barnet o-daou evit bezañ nac'het servij en arme gall (war-dro an 3 a viz Meurzh, evit doare).

An dro-mañ emañ dirak ar varnerien war zigarez e oa bet kavet d'ar 24 a viz Ebrel diwezhañ, e-tro an hanternoz, dirak ti-kêr Sant Nazer, gant liv du war e zaoarn, pa oa an hevelep liv ouzh ar mogerioù nesañ, skrivet warne bommoù koant, evel "Anglais hors d'Irlande", da lidañ donedigezh Philip a Vro-Saoz, gwal d'e wreg, e koun taol-kaer ur bagad soudarded saoz

e 1942.

Nac'h a ra Youenn bezañ kiriek d'al livadennoù, petra bennak ma lar emañ a-du a-grenn gant ar seurt oberoù, evit abegoù politikel eveljust. Daoust d'ar prezidant e klask an alvokad Tinières hag an testoù, komz eus impalaerelezh Bro-Saoz en Iwerzhon. Met ar pennbarner ne blij dezhañ nemet ar fedoù, ha kavout a raio mat goulen digant ar bolis skarzhañ ur saliad 30 a dud azezet war al leur.

5.000 lur a c'houlenn an Aotrou Maer evit al labezadennoù, daoust ma n'en defe ket goulenet ali e guzul (e-touez testoù Youenn ez eus ur c'huzulier UDBat). 1.000 lur heppen en devo, hervez ar varnidigezh.

M. Kerrain

... ouzhpenn an arc'hant-se e vo ret da Chaillou paeañ e brosez. Koulskoude n'eus ket bet prouet wann a-enep dezhañ. Nemet bezañ laket skeudenn Bobby Sands dindan fri ar Saoz Bras.

ANPE

Agence Nationale Pour l'Emploi
11, rue Debray
80043 AMIENS CEDEX

Amiens, le 30 novembre 1981

CENTRE REGIONAL DE PICARDIE

2 bis, rue Debray
80043 AMIENS CEDEX

Le Chef de Centre Régional Picardie de l'Agence Nationale Pour l'Emploi

A

Monsieur le Chef de Centre Régional de BRETAGNE

1 Place Maréchal Juin - BP 653
35008 - RENNES CEDEX

N°/JN N° 1169/82

Objet : Recrutement d'Infirmiers(es).

**COPIE
TRES URGENT**

Le Centre Hospitalier Régional d'AMIENS (80) a un besoin très important en Infirmiers(es) Diplômés d'Etat. Une action de recrutement au niveau National est donc menée par le Centre Régional de PICARDIE de l'A.N.P.E..

Vous trouverez ci-joint un ensemble d'affiches que je vous propose d'acheminer dans vos différentes Unités.

Le Centre Hospitalier d'AMIENS est prêt à accorder pour tout(e) Infirmier(e) qui signerait un contrat de 3 ans, une prime de 20 000,00 F (représentant la prime à la mobilité mentionnée sur l'affiche).

Je compte sur votre dynamisme pour que de nombreux curriculum vitae parviennent à l'Agence Locale d'AMIENS (2, rue Debray).

Cette affaire est suivie au niveau du C. R. A. par Monsieur Michel FAUQUET, Chargé de Mission Entreprises. Tél (22) 89-48-59 et (22) 95-61-06

LE CHEF DE CENTRE REGIONAL,

J. BOUCHERIE

PIRC'HIRINAJ

Mont a ran hiziv d'an ANPE. Bloaz hanter zo n'on ket bet eno (ul labour am eus. Gant ma pado...). Un tamm pirc'hirinaj...

N'eus ket pikol tud. "Deut on evit ar gemennadenn zo tremenet dec'h war FRs3zh... - Burev an aotrou, aze."

An aotrou zo o komz gant ur c'hlasker-la-

bour. Sellout a ran ouzh ar papiroù kinnig-la-bour, ouzh ar voger.

"Michelin-Clermont-Ferrand, tud yaouank n'o deus mui o servij-soudard d'ober, graet gante pe nann (talvoudegezh an arme o vont da goll), DUT stlennoeriezh..."

"Lille, krampouezher-(ez)". "Klañvdi Amiens, 20.000 lur evit divroañ..." Gast !

An aotrou zo bremañ e-unan : "Deut on evit al labour sekretour teiryezhek galleg-saozneg-brezhoneg. - Sekretourez ! N'oc'h ket ur plac'h, goc'h ? - Piv eo an implijer ? - Ne larin ket deoc'h. N'eo ket ur paotr emaint o klask, n'eus forzh penaos. - Kenavo."

N'eo ket hiziv e kemmin labour.

Lennit al liamm

BEP DAOU VIZ LENNIT

AL LANV

KELAOUENN

SOKIALOUR

BREIZHEK



KOUMANANT BLOAZ : 50 lur SKOAZELL : adalek 100 lur.

da AL LANV 8 st. Enez Vaz 29000 - KEMPER

... BERR HA BERR ... BER


An holl vignoned gonezet gantañ e Breizh, a-hed ar bloavezhioù, a vo laouen o c'houzout eo bet anvet an Aotrou Tailhanter da guzulier-parrez, e Ploueg-ar-Mor en dro gentañ.

Martial Pezenneg, penn bras BAS, zo bet anvet war listenn an tu-dehou e Rostren en eil tro.

Per Jakez Elias a c'houlenn digant Kemperiz votif evit Poignant, kannad ar P.S., a zo bet trec'het gant Eric Tabarly, a c'houlenn votif evit Bekamm (RPR).

Kontrol da veur a gêr all e Breizh, evel Brest, Naoned, Lanuon, Pondi, St Malo a zo aet war an tu-dehou, eo aet Redon ha Foujera war an tu-kleiz. An Aotrounez Bourges ha Fauchoux, izili eus ar PS a oa gwechall e PSU Rocard.

An Aotrou Cointat, bet maer Foujera ha ministr al Labour-Douar gant Giscard, ne fell ket dezhañ mont da azezañ gant an tu-kleiz e ti-kêr Foujera, evel ur c'huzulier ordinal. Chom er gêr a raio eta.



TAOLENN

LIZHIRT DA VREMAN.....	2
DESKADUREZH	
DIWAN, N'EO KET ECHU.....	3
AR C'HAPES.....	3
KELENN AR BREZHONEG E 83..	3
DILENNADEGOU	
CHOM A RA BREIZH EN TU K..	4
GWENED PE GWENNVED.....	4
ST HERNIN PATRON AN UDB..	4
DA LENN	
SINDIKADELEZH.....	5
ANNA VREIZH.....	5
KEMBRE	
UGENT VLOAZ 'ZO.....	6
IWERZHON	
EN UR LENN "AN PHOLODACT REPUBLICAN NEWS".....	7
TRO BREIZH	
SINEMA E KARAEZ.....	8
GOUREN 1983.....	8
40vet DEIZ HA BLOAZ BAS..	8
KELEIER	
ENGANN : EVIT AR FRANKIZ	
DA GOMZ.....	9
BARNET.....	9
PIRC'HIRINAJ.....	9
BUAN HA BUAN	
TAOLENN.....	10
KEMENNADENNOU.....	10
KINNIGOU LABOUR.....	10
BREMAN-8, st. HOUCHE-35-ROAZON - Koumanant evit 12 NIVERENN. : 96 LUR - SKOAZELL: ouzhpenn...	

MAKETENN SAVET GANT : Mikael Baudu, Silvi ha Joel Donnart, Jil Killevere, Mark Dufeil, Kaorin Legrand ha Lena Louarn

PENNADOU SAVET GANT : Charlie Grall, Jil Killevere, Iangi Louarn, Herve ar Bihan, Mark Kerrain, Daniel Milwicher, Erwan Kadoret, Olier ar Mogn, Erwan ar C'hoadig hag Yves Jardin.

TRESADENNOU GANT: Malo Louarn Erwan Kervella, Nono.

LUC'HSKEUDENNOU GANT: S.A.E., OSCAR, UPRACB, RBO, Charlie Grall, Lena Louarn, An Phoblacht.

MOULET E TI: Moulerezh Al lisoù 13, straed ar Monciz - ROAZON
pellgomz : (99) 79.46.78.

An pennadoù sinet ne engouezhlant nemet ar re o deus iz-
vet anezho.

NIV.C.P.P.A.P. 62974

Kazetenn di-klarlet hervez
leznenn ha tennet 800 laxe -
sonn anezhi. ISSN 0246-5264

hasit-ho pennadoù da
V-Breman anaoù ar 5
miz. (Keleier hag all...)



D'an 21 a viz Meurzh 1935 e varve Yann Schier e Plourio (Aoc'hob an Hanternoz), ar c'hentañ skolaer o vezañ savet e vouezh evit ma vefe kelennet ar brezhoneg e-barzh ar skolioù. Evit-se e oa bet krouet gant-taf e miz Genver 1933 an emsav "AR FALZ", an tri ger-stur anezhañ o vezañ : Breizh, al Laik-lezh hag ar Socialism.

Lidet e vo gant AR FALZ hanter-kantvet deiz-ha-bloaz he c'hrouidigezh dindan stumm un diskouezadeg hag a vo dalc'het e Mirdi Montroulez, e miz Even da zont.

Evit dont a-benn da lidañ a-zoare an darvoud-se, emañ AR FALZ o klask war-lerc'h fotoù, skridoù, dielloù, traoù a bep seurt, diwar benn Y. Schier, hag ivez diwar-benn stad an traoù e Breizh etre ar bloavezhioù 1920-1930.

Dreist pep tra, emaoomp o klask traoù :
- war ar skolioù : kartennoù-moger, kartennoù-post, rikoù-skoliad, urzhioù a veze roet d'ar skolaerien, danevelloù savet gant an enselle-rien, testennoù a bep seurt, diskleriadurioù war ar skolioù normal, hini Sant-Brieg dreist-holl...

- war ar c'hazarnioù hag an arme : ober a reas Y. Schier e goñje er 48vet Rejmant war droad e Gwengamp, etre 1921 ha 1923.

- war Plourio, e-lec'h ma reas Schier hag e wreg skol, adalek 1929 betek 1935. A bouez bras e vefe kaout testennoù tud o deus anavezet Schier er c'houlz-se.

- war vro Loudieg, e-lec'h ma voe ganet, d'ar 7 a viz Gwengolo 1901 : kartennoù-post, tresadennoù, traoù war ar galleg...

- war an emsav breizheg etre 1918 ha 1935 : testennoù, tresadennoù, skritelloù, hag all...

Kement ali, menoz, kennigadenn a vo degemeret mat gant AR FALZ, 6 straed Hir, 29210 Montroulez. Pellgomz (98) 62.17.20 pe (98)88.50.50

Pedet hoc'h da zont d'ober un tamm tro barzh Ti Tachenn Veurzh Roazhon d'ar merc'her 30 a viz Meurzh (adalek 2 e.gk.). Aze e kavot dilhad, le-vrioù, bitrakoù, h.a... evit netra (pe dost...)!
BRABRE

a vez anvet ar gwerzh-se Gounit ar gwerzh a yelo 'barzh ker skolioù Diwan.



Staj an F.R.M.C. a vo dalc'het a-benn ar 16 ha 17 a viz Ebrel 1983, e-barzh ti ar gevredigezh "COMMUNES" e Belajenn Min ar Wash, en Lanmodez (Bro Dreger).

Pal ar staj-se a vo klask ur stum da zastum pinvidigezhioù, soñjoù an dud a vor, peseurt labour ober diouzhtu rak pres a zo, ha peseurt mod adreñf ha kinnig anezho d'an dud.

Animatourien ar staj a vo Bernard Kadoret, Rene Richard ha Herle Denez. Skrivañ da : C.E.A.S. 18, ru A. Vallée-St Brieg

Sikourit "Le courrier de l'Unité", kelc'h lizher trimiziek ar CUAB (1, ru Gretry-44-NAONED)-20,00 L. evit 4 niverenn.



Preñt (ha gwerzhit!) al levrioùigoù :
- "La Bretagne historique à 5 départements, vraie région".
- "La Bretagne à 5 départements, vraie région européenne".
15 lur an tamm (pe 12 L. adalek 10, pe 10 lur dre 100).
- Hag ar pegoù-sun (evit an unvaniezh), 2 Lur an tamm, pe 1 L. adalek 10).
Owerzhet gant : Per Manac'h 37, rue des Sports-44700 ORVEZ.
- Arabat ankoumat badj SAE "Gwin Naoned d'ar Vretoned" 5 lur an tamm !

Deskiñ Koroll Iwerzhon a vo graet e Monterfil (Bro-Roazhon) eus ar 4 d'an 8 a viz Ebrel. 650 lur evit pep tra. Kelennerien a vicher o tont eus Iwerzhon. Aozet gant SHAMROCK, 1 all. la Guernache, 35510 Saezon-Roazhon. Pellgomz (99) 00.20.30.

D'ar yacu 31 a viz Meurzh e vo graet un abadenn sonerezh e "Sal ar Site" e Roazhon, da 9 eur gant ar strollad anavezet mat :

SPENDAL

Nozvezh aozet gant Skoazell Diwan Roazhon evit Skol Vamm ha Skol Kentañ derez Diwan Roazhon (40L).

RADIO BRO VIGOUDENN



D'AR MEURZH : eus 7 eur da 8 eur "Tal an tan".

D'AR MERC'HER : eus 2 eur da 3 eur kentel vrezhonek.
eus 7 eur da 8 eur kentel vrezhonek.

D'AR GWENER : eus 6 eur da 7 eur kentel vrezhonek.
eus 7 eur da 8 eur "Hag ar re all".

Digor eo R.R.V. d'an holl vrezhonegerien a garfe sevel un abadenn bennak, dont ur wech hepken da gomz, pe kas keloù.

Klevet e vez betek Brest (pa ne vez ket an arme o stankañ an hent d'ar gwagennoù, eveljust)

KINNIGOU LABOUR

Emañ DIWAN o klask evit miz Ebrel - miz Mae 1983

DANVEZ-SKOLAERIEH

Brezhonegerien ampart ha live BAC ganto. Mont e darempred gant Diwan Kreis- 29214-TREGLONOU Kas dre lizher an titouroù ret (Curriculum Vitae)-
(98)04.05.42.

Emañ c'hoazh Bretagne Alcool Sante o klask ur :

SEKRETOURIEH

a oar saozneg ha brezhoneg, kouls ha galleg. (5miz)
(99)54.15.60.

Emañ ar C.N.C.C. e Naoned (Centre Nantais de Culture Celtique) o klask

UR RENER

Evit gouzout hiroc'h diwar-benn ar post (rener-animatour), skrivañ da : Yann RAYNAUDON C.N.C.C. 3 straed Harrouys 44100 NAONED

(40)47.17.86.